



Intron Varia Kernitron e Lanneur.

*Evel an Tadou koz, ni oll a greiz kalon,
A houlenn ho pennoz, ô Gwerhez Kernitron.*

BLEUN-BRUG

Niv. 110 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

MAE 1958

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).
Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Deg vloaz labour	1
Tonton Lomm eur jadenn den, gand Saig San.tek	2
Traou gwelet er Portugal, gand an D ^r Tricoire	7
Eun dro-furchal e Sant-Tegonneg, gand L. Lok	10
Ar walenn vurzuduz, gand Yann Gorrigan	12
Deskom brezoneg	14
Keleier	16

La Journée de la Langue Bretonne

La Journée du Breton aura lieu, cette année, le JEUDI DE L'ASCENSION 15 MAI.

La FONDATION CULTURELLE BRETONNE, autorisée par M. le Ministre de l'Intérieur, organisera ce jour-là une quête sur la voie publique dans les cinq départements bretons.

Chacun sait que l'objet de la FONDATION CULTURELLE BRETONNE (Commission Culturelle du C.E.L.I.B.), est l'édition de manuels et livres nécessaires aux écoles enseignant le breton, conformément à la Loi du 11 Janvier 1951, l'attribution d'un prix littéraire annuel, la propagande en faveur de l'enseignement du breton et la réunion des fonds nécessaire à cette action multiforme.

On sait que le profit de cette collecte est également réparti entre l'enseignement public et l'enseignement privé et celui-ci ne peut y demeurer étranger.

C'est pourquoi nous recommandons aux maîtres et aux maîtresses de l'enseignement libre de nos Diocèses d'y intéresser leurs élèves en les faisant participer à cette quête.

Clément Cardinal ROQUES,
Primat de Bretagne ;

Eugène-Joseph-Marie LE BELLEC,
Evêque de Vannes ;

Armand COUPEL,
Evêque de Saint-Brieuc et de Tréguier ;

André FAUVEL,
Evêque de Quimper et de Léon ;

Vincent FAVÉ,
Evêque Auxiliaire de Quimper et de Léon.



133859

DEG VLOAZ LABOUR

Gand ar miz-mañ e krogom gand on unnegved bloaz labour, war dachenn ar gelaouenn, a zouge, da genta, an ano a **Groaz Breiz**, hag a zo deuet da veza, abaoe 1951, **Bleun-Brug**.

Niverenn genta **Kroaz Breiz** a deue er-mêz euz ar wask, e miz Mae 1948, skeudennet ha fichet koant, dindan bennoz an Aotrou'n Eskob Fauvel...

Goude trubuilhou ar brezel e-noa flastret ha luet kemend a draou, e oam êt en hent leun a huñvreou kaer, gand an oll esperañs-se a zouge en e gerhenn peb nevez-amzer.

Or menoz oa neuze, evel ma 'z eo atao bremañ, sikour ar Vretoned da anaoud gwelloc'h splannder o 'feiz kristen, ha lakaad da greski en o halon ar garantez evid Breiz hag he gened dispar...

Deg vloaz a zo tremenet, deg vloaz labour tenn, dindan an heol hag an avel. Ne lavaran ket, evel ar zôn, e ve tehet pell on huñvreou kaer, med anzañ a ran n'eo ket savet puilh an eost er pengennou on-oa hadet.

Al labour vrezoneg n'e-neus ket pêet morse e vicherourien.. med kalz nebeutoc'h hoaz en amzeriou digernezh ma vevom enno bremañ, ma 'z eo ken taget spered an dud gand kleñved al lorchentez hag an arhant...

Ar re o deus gouezet mired an niverennoù bet embannet, e-pad an deg vloaz, o-deus etre o daouarn danvez tri mell leor. Kaoud a raint dastumet enno ar bruzun euz pinvidigez ene ha spered Breiz, eun tam-mig euz an teñzor-ze hag a zo pehed e lezel da vond da goll...

Kalloc'h a lavare :

« An had on-eus hadet, or mibien her medo.

Hadet ganeom en daelou, int hen eosto er joa. »

Plijet gand Sant-Erwan, a raim e ouel heb dale, hag oll Zent Breiz, e teufe da wir e gomzou, ha skoazella ar re a labour evid eur bennoz Doue, en-dro d'or helaouenn.

Daoust ma 'z eo bihanneet niver ol lennerien, e talhom fiziañs ez aio gwelloc'h warhoaz, e chom hoaz eun tamm glaou beo dindan al ludu...

War a-raog eta evid Doue hag ar Vro, evid Breiz da virviken !

Lenn a reom war ar « Sentier » :

JOURNÉE DU BRETON (15 Mai)

La collecte annuelle, au profit du « Livre Scolaire Breton », autorisée par le Ministre de l'Intérieur, aura lieu le JEUDI DE L'ASCENSION, 15 MAI ; des vignettes « Evid ar Brezoneg » seront mises en vente.

Nous comptons sur la participation de nos écoles pour le plein succès de cette collecte dont le produit servira à l'impression de livres et à l'attribution de prix aux meilleurs élèves des cours de breton.

Tonton Lomm eur jadenn den !

gand saig santeg

« N'eus par e Breiz-Izel da bôtred Rosko ! » Ar zon eo a lavar kement-se. An hini e-neus he zavet, sklêr eo deoh, a oa eur Roskoad.

Peb den a gav meuleudi da rei d'e gêr. « Botmeur, aotrou, na kaerra parrez ! », a lavare din eur pillhaouer, unan diwar ar chorp. An aotrou Doué pa grouas an den a stagas e galon ouz bro e gavell. Gwell a ze !

Lusifer, diouz e du, a zeskas dezan kaoud istim re vraz evitañ e-unan. Gweled a reer tud o hlaouri gand an avi ouz peadra o nesa. N'int ket ker stank an dud o-deuz avi ouz an dud all. Peb hini en em gav mad evel m'ema. M'e-neus spered, hag e-nije nebeutoh a halloud hag a nerz, eo kontant. Ma n'e-neus ket a spered, ha m'e-neus nerz-korv ha yehed, eo kontantoh c'hoaz ! Ar fallia lakez 'zo er vro, a zo pabor war e veno. Laouennoh a-ze eo dezañ...

Laoskom Roskoiz evel m'emaint. Anzavom goulskoude ez int tud a hwad. C'hoant o-deus lod lavaroud ez eus eur berad bennag a hwad spagnoleg enno, gwad ruz, gwad tomm !... Selaouit istor « Tonton Lomm ».

✱

Eun istor goz, na petra ta. En amzer-ze n'edo ket ar vuhez evel bremañ, tud yaouank. On tud koz a zo bet tud a boan. Ar re-ze ne gilent ket dirag al labour. Abred diouz ar mintin ha diwezad diouz an noz, glao ha sehor, hañv-hoañv, pe er park pe en aot, yao atao ! Chom a zav n'eo ket arad ! Pa vez c'hoant gounid an tamm bara, e vez red skrapal...

D'ar mare m'edo « Tonton Lomm » war e voutou Pariz e bloaveziou diveza ar gantved all, linenn Moutroulez da Vrest a oa c'hoaz nevez digoret. Hardiz e veze an hini a gemere an tren : « Ha ma tehfe ar marh du diwar an aroudenn ! Tud keiz, pebez frigas !... »

Linenn Rosko da Vontroulez a oa c'hoaz dindan letoun. An tren-patatez az ee euz Kastell da Vrest, n'oa ano ebed c'hoaz anezañ. An otoiou nebeutoh c'hoaz.

Da Vrest ez eed, euz a Rosko, gand an hent braz, pe dre Landi, pe dre Lesneven, ha gand ar harr, pa veze d'ar marhad da vond gand legumach ; ar pez a c'hoarveze gand meur a Roskoad eur wech ar zizun.

Douar Rosko n'eo ket heb gwir e-neus brud : douar euz ar henta, douar abred. Nebeud a winiz, legumachou a beb, seurt : brikoli, artichaod, patatez, karotez ruz, chalotez, asperjez... a zave er parkeier trempet gand teil ha gand bezin, hag ivez gand c'houezenn Yann Gouer.

Siwaz, n'oa ket kalz a houlenn, n'oa ket digor ar hemwerz evel bremañ ha pôtr Rosko a ree marhad Brest en esper en em denna gwelohig. War an deiz e veze pourchaset ar fred, eun donell pe war dro (trawalh oa da vond keid all, 15 leo) ha lardet mad ar harr. En dervez araog e vije laosket ar marh ep e graou, maget dre banez ha dre gerh. Eur boutou mad a vije kempennet dezañ. Ha ma tigouezfe d'an diegi pe d'ar c'hoant kousked kregi ennañ, ar chareater a ouije an tu d'henn dihana : eur mell fouet ler, a oa e blas en dro d'ar houzoug, a veze lakêr neuze da sklakal pe da binsad an taillher. Da veza ma veze cheo vad peurliesha : kezeg e barr o nerz, mad da vale, dilloüz d'o faz da vond, skañv o gar da drotal en distro.

Abenn en noz ez ee ar Roskoad euz ar gêr. Er goañv e vije teñval sah pa lohfe. Eun harp (*arrêt*) a veze grêt hanter hent, amzer da lakaat ar zah-min d'al loan, ha d'an den da zipaka euz eur mouchouer-fri eun tamm bara kig hag eur banne. A veh ma veze digor ar hohu p'en em gave pôtr Rosko. Neuze e veze red gwerza, kas ar maninkinajou du-mañ du-hont dre ar ruiou, d'ar staliou ha... gortoz an arhant. Awechou e vije grêt eur bedenn en iliz Sant Loiz. Lein a vije debret en ostaleri ar « Chapeau-Rouge » e kichen ar *glacis*. Goude

e vije kemeret hent an distro. Hiniennou a deuje war eün ; lod all a jomfe da vanneata, dineh ha dibreder.

Amañ eo kavom « Tonton Lomm »...

Eun tammig mad oa kosoh egedon ha n'em-eus ket bet e anavezet p'edo c'hoaz e barr e vrud. D'e hanter kant vloaziou, ne ree ket « den gallouduz » : ment awalh, heb beza braz ; seiz ugent lur... gand e voutou koad hag e vragez c'houennad. A-hend-all eur sehard, hag eur glazard, warnañ liou an arne. A beb tu d'eur fri kaouenn, e zaou lagad, pa veze eun tamm droug ennañ, a zifoupe euz e benn askournieg, aounuz da weled.

N'eo ket ma 'z oa eur gwall gristen : kalon vad e-noa, kontant da zikour ouz red. Mez p'e-neveze eur banne — ha mad e kave ! — oa bourjin awalh. Ne veze ket êz komz diouz e zoare ; arabad e vije bet henn dislavared. Pa stagfe da gana hini pe hini euz ar soniou galleg desket gwechall epad e gonje e Verdun, e vije red chom sioul ha da vihana ober neuze da zelaou. Ar vreh en êr, eun dourn e kostez e skouarn, e lakez neuze an ti da dregerni : « *Halte-là, les montagnards sont là* »...

Pa veze an dornadeg gantañ e kare beza o voueta an dournérez ! Ne gave ket dezañ oa eun all da vond warnañ evid dizilha mad an eost. Eur wech, an amzer a oa seheduz, ha Tonton Lomm, tommet mad, a riklas e zourn en daboulin... ma oe malet pevar biz d'ar paour kêz. Ar merhed a ouele hag a hirvoude en dro dezañ e keid ha ma poanie ar wazed da zelher ar mekanik a zav. Tonton Lomm n'edo ket ar c'houezenn yen warnañ ha ne oe ket darbet dezañ simpla. E vreh en êr a droe evel eur vilin avel, ar bizied a zisribilh, pladet ha friga-set... Tonton Lomm a gane hag ar gwad a strinke e beb tu evel an dour beniget araog an overn-bred pa vez ar beleg oh asperjezi...

Evel kalz kouerien d'ar mare, Tonton Lomm a ree beb sizun marhad Brest, gand e varh « Laouig ». An den hag al loan a oa grêt an eil diouz egile. Tonton Lomm e-noa joa ouz e varh, n'e-noa nemed meuleudi da rei dezañ ; an teodou fall a lavare e veze ar c'houez warnañ pa stage da fougeal e loan. Laouig diouz e du a anezeve mad e vestr. Pa zante warnañ eur banne, ez ee gand e hent evel an avel, rag goud a ree e flemme neuze fouet ar chareater. Mez pa gavje dezañ e ranke chom re hir e tal eun ostaleri bennag d'ober kovig moan ha da baoata, e kemere e-unan hent ar gêr. Atao eh en em gave. Digouezet el leur e tispake eur hourichadenn hag unan bennag a deue d'hen distarna. Awechou e veze c'hoaz ar maninkineier e lost ar harr ; awechou all e vezent bet kouet gand ar stroñs. Laouig a gerze gand e hent ha ne gare ket distrei da zelled war e leh : Tonton Lomm diouz e du en em gave goude, gwella ma helle...

Pebez marh oa Laouig ! Ouspenn m'e-noa skiant evel eun den, oa lijer evel eur had, ha paduz da redeg evel eur « pur sang ». Al loan kêz ne ziskenne ket goulskoude euz a lignez ken uhel : prenet oa bet e foar Landi digand eur Herne bennag euz kosteziou Brieg.

Laouig a oa eur bide doubl, dezañ liou al ludu, hir e voue, e lost beteg an douar, pa ne veze ket kordigellet ha paket kloz ha berr. Eün en e gein, skoaziet mad, savet euz e zrean ha sonn e skouarn war ar marhad, ez oa ennañ danvez eur zell. Diouz an traoñ oa skañv ; e gill a oa hano evel hini eur haro. « Biskoaz gar voan n'eo bet manket da loan ». Laouig a oa dir e hini ha morse ne zirapfe. N'eus forz pegen lipouz e vije an hent, ha war bouez traoñ zoken, oa sur euz e droad ha ne houzanve ket ar hulier da illigad e bensou...

En dervez-se Tonton Lomm n'edo ket en imor vad. Ha leah a oa. E Brest n'oa bet tamm err er marhad. An artichaod a oa kouet warno ; ar patatez nevez n'oa ket a houlenn dezo... Beza balêet euz a Rosko da heul e garr, epad an noz, ha rankoud rei e legumachou a stok-varhad a oa eun digalon. Ha Tonton Lomm a skrahe e benn o soñjal er vuzell a rafe Katarin emberr pa zispakfe e wenneien war an daol. E riskl marteze c'hoaz da veza rebechet dezañ e vanne. Da veza n'oa ket Katarin eur geben, pell ahano.

N'eus forz penaoz, Tonton Lomm a oa reuskl ennañ ; ha sklêr oa, an hini a glaskfe trabas outañ en deiz-ze... a gavje ! ha pa vijent archerien e Landerne !

O ! n'eo ket ar re-mañ a zizoloas ar pod. Losteg ha pinouz e chomfont sioul gand an istor. Tonton Lomm avad, he-wech ma veze tommet dezañ ne ree ket a hinou vihan evid he displega. Ha setu amañ.

Ar hiz a oa gand « Pôtrede Brest » evel ma reed anezo, pa veze debret lein er « Chapeau Rouge » ha kerh e kov ar marh, da zond « war ar sklakig » d'ar gêr. Ar maninkineier goulo a veze lakêt e daou vern e lost ar harr ; ar chareater diouz e du en em lakee en e êz, awechou azezet war ar glouejenn, awechou all war ar plankenn a dalveze da gador-garr hag a veze kaset ivez d'al lost. En doare-ze ar gwint a roe dibrad d'ar marh hag ar harr e leah beza dahmat gwint-divint a jome kompez ha distroñs pa veze lakêt ar jeo da drotal. Pa deuje glao pe avel e vije taolet eur zali dreist ar penn ha mad ! N'oa ket sotoh an dud gwechall, nemed e veze nebeud a gankal ganto. Ar re yaouank o zo bremañ, ma vijent bet neuze, n'o-dije grêt na gwelloh na falloh. Peb rumm a rank heuilh e amzer. Ar re o-deus fae hizio d'ar re goz, a vezo fae dezo araog ma vezint koz o unan !

Tonton Lomm, e gwirionez, a vije bet e Landerne araog an noz, ma ne ve ket bet deuet eur barr arne. Luhed, kurun hag eur pil-dour hen dalhas da houdori en tu bennag e kichen ar Palud braz, ha na petra'ta, en eun ostaleri, kement hag ober ! Pa zavas an amzer, an heol a oa eef e kuz ha Tonton Lomm e-noa laosket eul lodennig euz e vemor e foñs ar werenn, a bignas en e garr heb goulou nag alumetez. N'oa ket den da vond war e hiz, na da nehi : riskla reas treuzi kêr heb sklerijenn ; nebeutoh a-ze e vije soñjet ennañ ! N'oa ket ar wech kenta dezañ da ober ar taol-ze d'an archerien.

Treuzi 'ra ru Vrest ; heuilha 'ra kê ar ster Elorn ; setu ar pont war e zorn delhou, kreiz kêr war e zorn-kreiz ; archer ebed : « Barreg oun adarre, eme Tonton Lomm outañ e unan ; E Landi eh alumin ; kementse espènet e vo atao ! » Edo bremañ oh arruoud e diavêz kêr, ken dineh ha tra, pa glevas eun taol sutêrez, a reas dezañ ober eur skrijadenn. Selled a reas a dreg e gein : daou archer war varh — lavarit din petra glaskent er mêz d'an euriou-ze ? — a deue timad war e lerh, hag a ree sin dezañ da jom a-zav.

Petra ober ? Senti ha peâ ? — « Hola ! eme ar Roskoad, ober tro fall e Brest ha mond heb gwenneg da Rosko ? » En eul lamm ema war e gilhourou, divadouet en eun taol kont : eur frap krenn war ar ranjeunou, eun taol fouet er memez amzer : « Ouei Laouig ! n'ema ket ar poent da jom da dorta. N'eo ket kezeg archer eo a yelo warnot, petramant n'eo ket Lomm va ano ! »

Evel n'e-nije komprenet, Laouig a reas eun heja d'e benn da houlenn kabestr, ha d'an trot err ! Inouet oa bet o paoata dindan ar glao arne ; warzu e varchosi edo o vond ; bremañ pa lavare ar mestr bale, ne hinc ket evid ober hent.

An archerien neuze, kounnar ruz enno, êz eo kredi, a zank o hentrou e kostou o hezeg, ha setu digor ar « *Raid hippique* ».

An hent a zo kompez ha diangaj. Dindan bolz ar stered o lugerni, ne glever e sioulder an noz nemed eur harr braz o storlokad, treid kezeg o taboulinad, hag en tiegeziou a beb tu, ar chas o razailhi ouz o jadenn, spontet, e kreiz o housk kenta, gand hevelep cholori.

Setu ar Roh gand e gastell ilhavg, Pont-Krist gand e iliz disto war ribl ar ster. Kaer e-neus Laouig skrâpa ha roeñva, an archerien a zali tost. Ar hezeg archer a veze kezeg reformet euz an arme ; diskuiz avad ha maget kreñv. Re Landerne a ranke beza pourset eun tamm bennag, rag dre ma tostaent ouz Landi e torre warno. Laouig er hontrol, tommet bremañ e gorbezennou, a gendalhe koulz ha biskoaz.

N'ouzon ket petra hoarvezas gand an daou arher e kêr Landi. Sur awalh e kolljont an tres euz Tonton Lomm. Amzer da rei alan d'o hezeg, da drei ha da zistrei en eur ober goulennou ouz keriz, ha Laouig — rodig a dro a wel bro — a oa dija en Drenneg. E Kroaz-al-leuriou, Tonton Lomm a jomas eur penad da zelaou : Kezeg an archerien a veze klevet bremañ o sevel d'ar Pontig. N'oa ket echu an abadenn !... Hag err adarre !

Laouig a zo dem war bouez-traon, gwint warnañ, heurtet gand e garr. Kezeg an archerien a zo samm warno hag a benn er zao ; e leh gounid eo koll

a reont. Ar gounnar a ro nerz. An daou archer a zo penneg. Ouspenn eun eur a zo emaint o haloupad an noz, hag e prometont amzer gaer d'ar pôtr dihouloù. Ya ! setu eur hanfart hag a vezo « lardet » p' o-dezo krog an archerien ennañ. Koustoud a ray ker dezañ e dehadenn. Tonton Lomm diouz e du a gomias inoui ha skañv-benni ; truez e-neus ouz e varh Laouig. Ha ma 'z afe da guzed, karr hag all, en eun hent doun bennag ? Mez e peleh ?...

O ti-kenn ema war Lambader. En tu kleiz ema ostaleri « Channed Frao » e leah m'eo anavezet mad. Eur froudenn a deu en e benn. « Su ! » emezañ d'ar marh Laouig, en eur jacha war ar ranjenn gleiz. Hâg heb terri koulz lavared e err, ez a e porz an ostaleri. Distarna 'ra e varh en eun taol-lagad ; hel lakaad a ra en eur speurenn houlo heb dale da lammed ar starnaj diwarnañ ; serri ra dor ar marchosi. Amzer da rei an afer da gompren d'an ostizez, edo an archerien en ostaleri. Tonton Lomm ha Channed a reas an azenn outo evid ar gwella, hag an daou reder-noz a gavas koulz distrei war o giz da Landerne, o meudig en o dorn !

M'o-dije bet spi da vont el leur o dije kavet karr Tonton Lomm war lost-wint hag er marchosi ar marh Laouig an eonenn wenn warnañ, prest da zizalana.

Mez neuze... o-dije bet kollet nêt e blijadur ouz Tonton Lomm. hag ouzomni !

« Pa vez afer ouz eur penn-maout
Eun tamm izign 'zo mat da gaout. »

Tonton Lomm a zo arru bremañ war an oad, koulz ha Katarin e bried. Doue n'e-neus ket roet dezo a vugale ha pegwir o-deus eun tamm peadra, perag chom pelloh da duriad douar ? Evid a geid 'zo da veza !...

Sina reont o zraou d'o breudeur ha d'o hoarezed, peb hini evid 1.200 lur ar bloaz a houed-mikêl.

Daouzeg kant lur ha daouzeg kant lur a ra tostik da zaou vil hanter. N'eo ket eur fortun ma karit. Hizio n'eo netra. Araog ar brezel 14 oa eun dra bennag ! Daou zenig oajet a helle brao ober o zreuz gand beb a gand lur ar mi4, pa vezent kempenn warno.

Katarin a oule gouarn. Tonton Lomm n'oa ket heñvel ! Grêt gantañ e zilez, n'oa ket pounner e labour. Trafiket oa bet ar marh Laouig. En e speurenn oa bremañ eur hraouiad lapined, Tonton Lomm o servicha dezo da mad mager. Beb sadorn e veze lakêt hini pe hini ouz ar skourr. N'eo ket peb kouer a helle d'an ampoent kaoud kig lapin beb sul d'e lein en distro euz an overn-bred, goude poania hañv-hoañv.

Eürusoh daou ne vije ket bet e Rosko, ma ne vije ket bet Tonton Lomm re zibreder. Boueta lapined, faouta eun tamm bennag a geuneud, turlutad wardro an ti hag al liorz e serr floura o hein d'e gi ha d'e gaz, n'eo micher ebed evid eur gwaz. Tonton Lomm hag a gare e vanne en em roas muijoh-mui da eva. Dre laer e ree tehadennou ha stankoh stanka e veze « goret ar fourn » en ostaleri an Aber. Awechou p'en em lakfe d'ober hoz, e rafe eiz derveziad lieb-distaga.

Kementse ne ree ket afer Katarin. « Prim e verra ar houlaouen pa vez tanet dre an daou benn. » Gouel-mikêl Tonton Lomm a goueze tamm ha tamm en ostaleri. Hini Katarin, trawalh evid unan, a oa berrig evid daou.

Daoust da-ze ar vaouez kêz a jome gand he 'fried, a guze warnañ gwella ma helle. Evel ma ve moyen da helci war ar mevier !... Eun dervêz goulskoude, re bounner war he halon, ez eas d'en em glemm ouz he breur kaer, amezeg tost dezi war ar marhad, hag e tizoloas ar pod. « Lomm e-noa nevez touchet e houel-mikêl ha ne entente a briz ebed diskregi anezañ. Krog oa d'ober eur reuziad eva ; an arhant ne jomfe ket en ostaleri a vije kollet pe laeret ; hag en ti, evid ar bloaz, e vije berrentez. »

« Bez dineh, Katarin, eme Visant dezi. Abenn-warhoaz emañ peziou aour Tonton Lomm en da bres. Me 'n em garg a gementse. »

Eun tri ugent vloaz den a oa euz Visant. Ma n'edo mui en e wir-wella, oa c'hoaz gwaz awalh. Hag eur mab pôtr yaouank e-noa ha n'oa hini all ebed da vond warnan nag e Rosko nag e Kastell. Maze oa e ano. Visant ha Maze a oa o vond da ober eun dro gamm da Tonton Lomm, hag e-nije soñj anezi ar rest euz e amzer.

An noz bremañ he-deus astennet war ar bed he mantell. N'eus ket a loar. Teñval eo evel sah al lutin; eur vloh ne gavje ket he leue. Visant ha Maze o-deus kemeret hent an Aber, rag gouzoud mad a reont e peleh e vez Tonton Lomm o terri e zehed.

Edon o vond d'ankounac'haad lavared deoh oa eur zah gand Maze dindan e gazell. Ne zivinfeg ket d'ober petra...

En em gavet er pleg-hent kenta, el leah m'ema an toull-karr a gas d'an aod, e penn an tevenn, va daou zen a zo chomet a-zav e goudor eur galzenn vizin seh, ha gortoz a reont ma tremeno Tonton Lomm gand e govadig.

N'eus ket eur mouch-avel. Ne glever nemed trouz klemmuz an houl adenno-gourlenn o vervel war ar bili.

Souden, setu eur vouez raouliet o sevel, duhont warzu Maner an Dig. Ema Tonton Lomm o tistrei d'ar gêr, eur ganaouenn gantañ ken a skrij al laboused-noz e koad Kerestad gouezet gantañ eur wech muioc'h « petra eo kaoud plijadur ». N'eo ket mézo da goueza, mez tommet da gosteza. Esoh a-ze e vo da Vaze ha d'e dad éntent outañ. Ha va daou ganfart o deus studiet mad o hentel.

Dineh kaer Tonton Lomm a gendalh gand e hent. Kerkent ha m'eo tremenet, e reont eul lamm warnañ a-dreg e gein. Ger ebed, na petra 'ta. Maze, digor e zah, hen taol dreist penn Tonton Lomm, dreist e skoaziou; en eun taol kount emañ ensahet beteg e vandenn. Dallet eo ar paour kêz den, abafet, hag hualet: Maze e-neus peg mad en e alzourniou. Ez eo da Visant furchal e godellou al Lampoun, a grén bremañ en e wragez, evel eur bern deliou, p'rest da drei e hwad da divezvet en eun taol.

Kavet eo an teñzor! Eur bilhed bennag a zo anezañ, hag eun dournad peziou-aour.

Visant a ra sin da Veze eo grêt ar gefridi ha grêt-mad hag e kerz diwar err da gas da Gatarin ar gouel-mikêl presiuz, n'oa ket c'hoaz re voulhet.

Maze krög stard atao e Tonton Lomm a dosta anezañ ouz an toull-karr, ha gand eun taol penn-glin e kas anezañ sah hag all da hoari patati war an trêz-mal. Araog m'e-neus Tonton Lomm gelllet en em zilulia gand e sah, Maze a zo ét pell, liou ebed ken anezañ.

Petra hoarvezas goudé? Deuet ennañ e-unan, Tonton Lomm e-nevoe spi da zastum ar zah hag a yeas gantañ war eun d'an ti tosta evid gwelet ha n'edo ket ennañ merkou ar perhenn. Siwaz, ar zah a oa diverk. An daou farser n'edo ket o micher ganto da zeski!

Losteg, goullou e yalh, Lomm a gemeras hent ar gêr, « ar ganaouenn chomet a-dreuz en e gornailhenn »!

.....

An hini a gavas berr he amzer er bloavez-ze eo Katarin. Tonton Lomm ne hellas ket dond da houd peseurt taol farsuz a oa bet grêt dezañ. Ha pa houlenne arhant da vond da ostaleri an Aber, Katarin d'e zro a zave he mouez, dichek: « Hag e peleh emañ da houel-mikêl, bolom?... »

Diwar « Kannadig Landi » (Meurzh-Here 1957).

Saig SANTEG.

eur pennad brezoneg êz

TRAOU GWELET ER PORTUGAL

(Trede pennad)

A-raog mond pelloh gand an hent.

« Resevet am-eus niverennou diwezà « Bleun-Brug », med n'am-eus kavet netra ken diwar benn ar Portugal. Ha koulskoude, ne oa ket echu ganeoh? Ne skrivit mui e-barz « Bleun-Brug »? — Setu pezh o zo bet goulennet diganin gand hini pe hini euz on lennerien. Rag, éuruzamant am-eus tu da weled unan bennag ahanoh, lennerien gêr. Ya, éuruzamant... E mod-all, ne vijen ket bet evid gouzoud hag-eñ e kavit mad ar pezh a gontan deoh, ha ma tleas klask kenderhel, rag, daoust d'ar pezh a houlennean beb tro, n'eus dén ebed en ho touez o skriva deom ar pezh a zoñjit... Den ebed? Nann, unan e-neus krivet: ra gouezo puilh bennoziou an Aotrou Doue warnañ. Setu amañ ar pezh a lavar deom:

« AOTROU,

« Plijadur meus bet da lenn oe'h « penad » diwar ar vro Portugal. Met n'eo ket duhont ebken a vout (a gresk) an Eukaliptus; rakar mimm mesomp (rag, ni on-eus) amañ, hag e vout mat: « citriodora », « globulus » ha daou all c'hoaz!

« Gourhemennou.

« M. MORDELET,
milkervarc'h, Lanvenegen (Morbihan). »

Lanvenegen? Biskoaz n'am-eus klevet an ano-ze, ha koulskoude e kav din e anavezan Breiz-Izel gwelloc'h egéd ar Portugal! Ha me da klask ér gériadur: « Lanvenegen, canton Le Faouët ». Ar Faouët! Ar horn-bro-ze a anavezan mad, koulskoude. Med, Lanvenegen a zo e kreisteiz ar Faouët, ha me a anavez gwelloc'h tu an hanternoz.

N'eus forz penaoz, an dachenn-ze n'eo ket hini klouarrâ Breiz-Izel e-kreiz ar goañv. Neuze e tle an Eukaliptus galloud kreski n'eus forz e pe leh, e Breiz-Izel, nemed war ar menez, e-kreiz ar vro, e leh e vez yénnoh. Daoust hag-eñ ne vije ket den all ebed én ho touesk oh anavezoud gwezh Eukaliptus e Breiz-Izel? Ha ma' z eus, unan, daoust hag-eñ ne hallfe ket tapoud krog én e bluenn...?

Marteze e hallfed planta koajou Eukaliptus e Breiz-Izel, neuze, war an tachennou gleb (gwerniou, geunioù, etc.) kén stank ér vro, peogwir eo mad an Eukaliptus da zeha an douarioù gleb. Dre ma tennont kalz dour diouz an amezien (12 metr, ma n'on ket faziet).


O vond gand an hent adarre.

Soñj ho-peus e oam erru war an aod, én eur porz-mor, Povia-de-Varzim e ano, o selled ouz anioù kristen ar bagou. Daoust dezo kaoud anioù kristen-rik, bagou ar Bortugaliz a zégas soñj deom euz bagou ar baganiz a-raog ginivelez Jezuz-Krist. Sellit outo war ar skeudenn, gand o begou hir ha moan, heñvel-mik ouz bagou ar Fenisianed koz. E porz-mor Nazaré emañ ar wech-mañ. Ar besketaerien a zo kén iskiz all, gand o bragou hag o rochedou marellet, karzennou braz livet warno, hag o fas suilhet e-giz kreun bara chomet pell re bell e-barz ar forn. Pésketaerien Breiz a zo gwennkann o hroheñ e kichen ar re-ze! Hag ar merhed 'ta! Rag, merhed zo o vond hag o tond en o zouez, traou a beb seurt ganto war o 'fenn. Ha pebez

gwiskamant a vez ganto ! N'ouzon ket ped broz o-deus lakeet endro dezó, ar broziou dindan eun tammig hirroh egéd ar broziou war horre, kén e vez gwelet liou peb hini anezo o tiskoacha én traon : gwenn, melen-kaer, ruz-mouk, ha me oar-me : seiz pe eiz bennag zo anezo, bepred. Gand an heol-grizias o splanna, ne dléont ket kaoud riou (kaoud anoued), na tost !

Med, setu eur vag o tond. Merhed zo e-barz, ive, asamblez gand ar baotred. Erru eo ar vag tost d'an tréz (sable), bremañ. Hag ar bésketaerien ha lammad er-mêz, lod o tapoud krog én eur gordenn da zacha ar vag, lod all o vounta, paotred ha merhed mésk-ha-mésk, he setu ar vag war ar zeh. Hag int ha kregi e-barz paneriu peotramant kasedou glaz, ha mond da azeza én disheol, ouz ar bagou kostezet war an tréz. Petra a reont ? Digeri a reont o faneriu ? A ! emaoim ganti, bremañ. Emaint o vond da zebri lein (merenn). Ha me ha goulenn outo én « portugaleg » (va « portugaleg » a zo eur seurt portugaleg diwar ar spagnoleg) : — N'it ket d'ar gêr da zebri, eta ? — Nann, emezo, peogwir e tléom mond da bésketa adarre, bremañ. — Hag e teuit da zebri war an aot ? Ne zebrit ket e-barz ho pagou ? — A nann !

Iskiz eo kement-se, a gav din. Ha gand bagou bihan e-giz-se, ne dle ket ar béskèrèz beza druz, a zoñjen. Fazia a reen. Ar béskèrèz a zo *eil binvidigez ar vro* (goude ar gwez-dero spoue, ma ho-peus dalhet soñj). Rag, stank-stank eo ar pésked e-barz moriou ar Portugal. An dra-ze on-eus komprenet mad e porz-mor Sezimbra, én tu all da Lisboa.



An noz a oa o tond dija, pa errujom eno. N'euz forz, me a houlenne gweled liou an dud hag ar bagou eno ive. Eur voger vihan a oa dirag ar mor, tud azezet warni o kuriuzennad. Ha me mond da guriuzennad asamblez ganto... Souezet-mik, bamet, e chomis o weled petra a oa én tu all d'ar vogerig. Renkennadou hir pésked o lugerni e-giz arhant-gwenn a oa renket brao war an tréz melen, tud o vond hag o tond én o zouésk, azenned gand paneriu war o hein o hortoz én tu-mañ, hag én tu all renkennadou pésked adarre, beteg pell-pell war an aot. Heñvel a-walh ouz eur prad divent, nevez trohet ar geot ennañ. Kalz kaeroh avad, gand ar pésked arhanteg rénkèt kén ingal. Re memez ment toud e-barz eun heveleb renkennad. Ar pez a zo dispar eo ar renkennadou « espadas » (espada : kleze ; « épée » én galleg) : ar re-ze a zo pésket hir-kenañ (ouzpenn eur metr), plad ha lugernuz evel laonenn dir eur gontell. Hag amañ, tost deom, ar mellou pésked kov-teo-ze, astennet peb hini war eun dorchenn dréz (eur bern sabl)... Med, perag kement-se ? Eur gouel bennag zo hirio, marteze ?

O trei va fenn, e welan eur paotr yaouank (pe eur paotr yaouank koz, kentoh) azezet war ar voger em hichenn, eul levr digor gantañ én e zorn, hag a dle gouzoud mad doareou ar vro. Goulennom outañ.

— « Beb mintin war dro unneg eur, ha beb noz, emezañ, e vez greet ar seurt gwerzadeg-se. Marhadourien o tond euz Lisboa pe euz leh all a deu amañ da brena o renkennadou pésked digand ar bésketaerien. Chipotet e vez kalz, evel just. — Ha perag e lakeont o 'fésked e-giz-se ? — Evid klask gwerza anezo kéroh. Bravoh int da weled, er mod-se. Giz koz ar vro eo ive.

— Bremañ e komprenan perag e vez lakeet ar pésked teo peb hini war e vern tréz. — Ya, e-giz-se, e seblantont beza tevoñ hoaz ! — Pell hag hir e tle paodud kement-se : amzer da renka ar pésked, d'o gwerza... — Diou eurvez bennag heb tro. — Ha bemdez e vez greet ? — Bemdez ; diou wech bemdez. Ha bemdez e teuan da weled anezo. Eun dudi eo. Kalz tud a deu egisdon (evelдон) da ziverra o amzer, sellit.

Sur mad, hennez a zo pinvidig a-walh evid beva heb labourad tenn evel ar paourkêz pésketaerien a deu diou wech bemdez da astenn o 'feskéd war an tréz d'o gwerza kerroh e-giz-se. Hennez ne dle ket labourad kalz evid gounid e vara ; nemed e tle labourad gand e spered, rag, eun dén a dres ha désket mad eo da weled. Respontet e-neus din e galleg kaer ive. Kén e houlennom outañ e pe leh kavoud lojeiz. Hag eñ ha skriva ano eun ostaleri war eun tamm paper. Neuze e remerkan e viz bihan dindan e stilo : eun ivin eo ar pez a welan e beg e viz bihan ? Ya, tudou, eun ivin hir-hir, daou pe dri santimetr, en hini eo ! Ha setu ar paotr o tiskouez deom gand an ivin hir-ze an ano ema o paouez merka (oh éhan skriva). — Kenavo, ha trugarez deoh, aotrou. — « Au revoir », emezañ.

Ha me diouztu da lavared d'am gwreg : « Remerket ho-peus e ivin hir ? ». — « Ya, emezi. Med unan all seurt-se am-oa gwelet dija. » — « Me n'am-oa ket gwelet re seurt-se hoaz ! » Evid gwir, tri pe bèvar baotr on-eus gwelet gand eun ivin hir e-giz-se, pe gand daou, unan ouz peb dorn (ar bizied bihan heb gwech). Eur hiz koz deuet euz Bro-Chin, moarvad, peogwir eo bet martoloded ar Portugal e-touésk ar re genta o vond d'ar broiou pell. Eun doare da ziskouez, evel mañdarined ar Chin, e hallont gounid o zamm bara heb labourad. Ha kement-se én eur vro gristen, e leh e vez kement a dud o poania stard evid klask gounid o zamm kreun ? Ar Portugaliz ne reont van ouz kement-se. Kant bro, kant giz ; kant parrez, kant iliz.

(Ar pèvare pennad diwezatah.)

D^r J. TRICOIRE.



Konkour ar prezegerezh evid Bleun-Brug 1958

Ar honkour-mañ a zo digor d'ar re yaouank euz 17 vloaz da 30 vloaz, paotred ha merhed.

20.000 lur a zo da veza rannet etre ar re a vo da genta.

Setu amañ danvez ar brezegenn :

« Diskouezit penaoz e hellfe ar yaouankizou a vremañ diwar ar mêz, hep trei kein a-grenn d'an amzer dremenet, kemered o 'flijadur en eun doare breizeg ha kristen, evid brasa mad o horv, o spered hag o ene. »

Ar brezegenn, hag a dle beza desket dindan eñvor, ne dle ket padoud ouzpenn 5 pe 6 munud.

EUN DRO-FURCHAL E SANT-TEGONNEG

Bleun-Brug 1958 a zo da veza e Sant-Tegonneg.

N'ez eus, e Breiz, leh ebed o kaoud, dindan ken nebeud a ehonder, kemend a draou kaer ha m'he-deus ar barrez-se da lakaad dirag daoulagad an dud a vez ken niveruz o vizita heli iliz, he halvar, he harnel ha porched he bered. An traou kaer-ze, oll, a zo strollet e kreiz ar bourg, war eun hanter devez-arad, d'an hirra tout.

E neb leñ, war ken nebeud a ehonder, ne vez kavet kemend a vrezonég kizellet war an traou kaer-ze, brezonég meur a gant vloaz dezañ koulz ha brezonég a vremañ.

War borched bolzet ha kizellet ar vered koz, ema ar geriou-mañ :

ITROVN MARIA GVIR SICOUR | NI HO PET HVANTEC DON RECOUR |
HVI EN QVENTAF ADVOCATES | EVIT PECHER HA PECHERES. 1587

Evid gwir n'int ket renket evel-se. N'on-eus ket gallet o renka amañ evel m'emaint, re voan paper or helaouenn.

E diabarz ar garnel eo penturet war eur blankenn, gwall guzet avad, a-zeou :

O MA C'HALLEME DRE VA SOUFFRANÇOOU PRENA E VVEZ D'AM SALVER
CARANTEZUS PEHINI A VELAN MARO ! ME GARRE SOUFFR MIL
MERZERENTI EVIT REI VA UR MOMENT A VVEZ DEZAN, DA VIANA E
CONDUIN PELLOC'H VA VVEZ A VARO ECREIS AN DAELOU HAC AN
HVNADOV.

A-gleiz, ar geriou-mañ :

PEC'HER. DEVS. DA. OELA. DA DREID DA GROVER.
CAVS OUD EVS E VARO, AC EZ-E DA SALVER.
E VARO A ZESQ DID PETRA RENQU'EC DEZ-AN,
EVIDOUD E MARO, BEF ETA EVITAN.

War brenecher an iliz e weler kemend-mañ (mond gand an tu deou d'an tu kleiz) :

SANT VAZE. *Jesus en eur dremen a velas ascet e ti a... guirion eun den hanvet Maze hag a lavaras d'hezan deuet d'ham heul ha kerkent e savas hag ez eas d'he heul.* (Vaze, IX, 09.)

SANT MARC. *Hervez aviel ar Sant ma Jesus a lavaras d'he ebetel iit dre ar bed holl ha prezeghit va aviel d'an holl grouadurien.* (St Marc, VI, 15.)

SANT PAUL. *Heureus ar ve... sel em eus me choazet evit doughen va hano dirag ar boblou payan dirag ar rouanet ha dirag bugale Israel.* (Act. IX, 10.)

Eur fazi a zo bet grêt gand ar gwerour : Skeudenn Sant Paul a dlefe beza a-gleiz hag hini Sant Lukaz a-zeou.

SANT LUKAS. *Ar Sant ma meulet dre an holl ilizou abalamour d'he aviel a oa kenoberour Sant Paul hag hen heulias bepret en e veachou.* (II Cor. VIII, 10.)
N'ez eus ano sant ebed gand gweren Sant Yanni na gand hini Sant Per ; med anad eo da he sant eo gouestlet pep hini :

He-ma eo an diskib a voa karet gant Jesus hag a reposas war he galon er goan diveza. (St Jean...)

C'houi a zo Per ha c'hui a vezo ar mean font eus an Ilis hag holl c'halloud an Ifern ne vezo ket treac'h dezi. (...)

En iliz, war gwer ar prenecher :

SANT PHILIP. *An... a brezeghe an aviel hag ar bobl a zelaoue gant evez ar pezh a lavare dre ma ...nt ar burzudou a rec.* (Act VIII.)

SANT JACQUES. *An abostol-mañ, servicher bras da Zoue a oa kar tost da Jesus-Krist hag evel e vestr a varvas en eur bedi evit e vourrevien.* (...)

SANT BARTHELEMY. *Eus an abostol ma, pesketaer a C'hallilée, Jesus a reas ive eur pesketaer tud, ha goude beza gouneset eun niver bras a eneoù e c'houzanvas ar c'hrista merzerenti.* (Hist. Ecc.)

SANT ANDRÉ. *An abostol ma, breur da sant Per, a oa unan eus an daou ziskibl a oa gant Sant Ian Vadezour pa ziskuezas dezho oan Doue ha kerkent e oa cat da heul Jesus.* (St Ian, I, 40.)

Don de M. Le Bras, prêtre, et des familles Le Bras et Tourmen, Bothalan.

SANT THOMAS. *D'an abostol ma eo e lavaras Jesus kredet oc'heus Thomas dre m' oc'heus gwelet, eurus ar re n'ho deus ket gwelet hag o deus kredet.* (St Jean, XX, 26.)

SANT VAZE.

Ne jom netra euz ar pezh a zo bet skrivet war ar werenn-mañ, ma 'z eus bet gwechall, da vihanha, eun dra bennag. Sant Vaze a zo ive e skeudenn gand e ano war ar prenest diweza.

A-dreñv an iliz, war-zu ar blasenn ema monument bugale Sant Tegonneg Maro evid ar vro.

TREMENIAD, DESK AMAN HANIOU BRETONED
A VARVAS VIT AR VRO E BLEUN O YAOUANKIZ,
O GOAD SAKR EN ANER NE VO KET BET SKUILHET
MA LINTR EUN DEIZ ER BED BANNIEL AOUR AR FRANKIZ.

TAOLENN EN ILIZ : *Doue hag ar vro. O Jezuz trugarezuz, roit dezo ar vuez peurbaduz.*

WAR AN IMACHOU : Banniel : *Sant Thegonneg, pedit evidomp.* (War ar banniel ema skoued Breiz.) *Kalon Zakr a Jezuz, o ped truez ouzomp.*

Er vered n'em-eus gwelet bez ebed gand geriou brezonég. Ar beziou a zo nevez oll, ha renket, ha ken kempenn eo ar vered, kempenna hini a anavezan, ma ne zav enni geotenn ebed.

Eul levrig *Kantikou parrez Sant Thegonneg* (dezañ 28 pajenn) a zo bet moulet e Brest, Moullerez ru ar C'hastell, 4, e 1935. Ennañ ema *Kantik I.-V. Wir-Zikour*, patronez ar barrez, hini *Santez Berhed*, patronez eur japel, diwar dorn J. G. (Jean Guerneur, a gredan) hag hini *Sant Tegonneg*, patron ar barrez.

N'eo ket diêz eilskriva an traou-ze, diêsohig eo o haoud, ha diêsoh c'hoaz gouzoud levezon piou a zo bet penn-koaz m'eo bet skrivet ar geriou, peur ha perag. Aze 'ma koulskoude talvoudegez ar furchal.

Ar pennad hirra brezonég kizellet n'ema ket kouskoude e Sant-Tegonneg. N'ema ket pell ahalese. BLEUN-BRUG hel lavaro deoh er miz a zeu.

L. LOK.



DA REIZA E BLEUN-BRUG MIZ EBREL

Eur fazi mantruz a zo bet greet e barzoneg **Mab an Dig**, pajenn 3. Setu penaoz e ranker lenn al linennou kenta :

Eur wech... o ! pell 'zo abaoe

E teuas Doue

En eun ti euz or Breiz

Ennañ bugaligoù e-leiz

Da zibaba unan

Dezañ eul lagad lemm hag eur galonig hlan :

« Ar gwiniñ, 'me Zoue, a ziriñ er meziou

Dre ziouer mederien d'e gas d'am grignolioù. »

AR WALENN VURZUDUZ

Evel beb bloaz, Miz Mae e-noa ledet war an douar e vantell hlaz. An noz a oa sioul ha leun a houe vad ar bleuniou. War ribl ar ganol, Mari a oa kousket en he zi bihan gand he zri bugel, eur verh ha daou baotr. He gwaz a oa eet da veaji.

Wardro hanter-noz, Mari a oe dihunet gand eur sklerder souezuz a sklerijenne an ti, evel eur ganevedenn gand he liviou marellet. Da genta e chomas sebezet pa zigoras he daoulagad ; goude en em lakeas azezet, heb gelled lavared gér : eur verhig vihan a oa e penn he gwele, eul letern arhant gand gwer a beb seurt liou en he dorn. Ar verhig he fedas gand doujañs, hi hag a oa ken kustum da ober wardro ar re glañv, da zond ganti, rag he Rouanez a oa gwall-glañv.

Bremañ oa teñval-sah an noz. Med Mari a oa mad ouz an dud ha n'oa ket aonig, tamm ebed ! Buan e wiskas he dilhad. Goude ober sin ar groaz war dal he bugale kousket-mik, Mari a yeas dillo da heul ar verhig. Mond a rejont o diou ouz krêh, beteg eur skalier a zeblante diskenn beteg ar ganol. Med goude eun nebeud pazennou, ar skalier a gendalhas dindañ an douar hag ar reier, donnoh-donna bepred. Beradou dour a goueze euz ar volz, evel pa vefed bet dindañ ar ganol.

Neuze eh errujont dirag eun nor vihan, diwallet gand eur horrig. Hemañ a zigoras an nor gand prez. Ar verhig ha Mari en em gavas en eur zal. Tri hent a gomañse enni. An hent e-kreiz a oa uhelloc'h ha ledannoc'h eged an daou all. E gemer a rejont ha dizale e tigouezjont dirag eun nor aour ha perlez a zigoras raktal pa lopas ar verhig warni.

Eur verhig all, na brasoc'h na bihannoc'h eged ar genta ha koant evel an deiz gand he dilhad seiz, a ambrougas Mari pelloc'h, epad ma chome ar genta er-mêz gand he letern. He dorn e dorn ar verhig, Mari a gerzas gand tiz dre eun ari-dennad kambreier leun a deñzoriou heb priz, beteg eur zal vihan a lugerne gand ar perlez hag ar vein prisiuz.

War eur gwele bihan, goloet a zeiz hag a zantéléz aour, edo Rouanez ar Horriganed, dizeblant, war he dremm liou ar maro. Ar zervicherezed a yee hag a deue war he zro, sioul, dihaloud ziwas !

E gwirionez, Mari a oa gouizieg kenañ wardro ar re glañv he ne oe ket pell o houzaou penaoz en em gemer evid savetei ar Rouanezig ! Hag a-benn eun eur edo dija er-mêz a zañjer ! Daoust dezi beza hoaz simpl ha livet fall, eh azezas war he gwele, an oll laouen endro dezi.

Dioustu pa hellas kaozeal, e trugarekeas he madobereurez hag e roas dezi eur walenn aour, evid delher soñj anezi. Neuze e lavaras da Vari :

— Da-Houel-Yann, pa vezo an heol o kuzad, bezit e traoñ ar Menez. Kemerit ar wenojenn a heuilh ar ganol ha kerzit ouz krêh, beteg ma kavoh eur vran hag eur sparfel oh en em ganna abalamour d'eur pichon maro. Merkit ar plasze ha diwallit mad da goll ar walenn : keid ha ma chomo en ho familh ho pezo chañs hag eurvad...

Goude, Mari a oe heñchet gand ar memez merhig beteg an nor perlez. Eno e kavas an hini genta ouz he gortoz. Kemer a rejont an heveleñ hent, dre ar skalierou sonn, beteg ar gorre. Ar verhig a zizroas buan d'an traoñ ha Mari a deuas d'ar gêr, skuiz-maroc'h. Ar vugale a oa atao kousket. Mari en em daolas war he gwele ha ne reas nemed eur housk beteg ar mintin.

Pa zihunas, Mari a zoñjas he doa huñvreet ! Med pa zellas ouz he dorn e welas ar walenn aour ouz he biz ! Eur walenn greet gand teir naer korvigellet ha nezet an eil en eben. Pa deuas he gwaz d'ar gêr, Mari a gontas dezañ ar pezo a oa bet erruet ganti. Med he gwaz a c'hoarzas hag a lavaras dezi n'oa kement-se oll nemed sorhennou !... Evelato pa welas ar walenn aour...

Ha da Houel-Yann, Mari hag he gwaz, laouen hag eun tammig enkrezeñ er memez amzer, a oa harp e traoñ ar menez. Pa gomañsas an heol da rinka dreist kribell ar menez, e kerzjont gand ar wenojenn ha prestig e klevjont

tabut ha cholori : e kichen eur vodenn spenn-du, eur vran hag eur sparfel a oa oh en em ganna lost d'eur pichon maro !... Gand eur vaz, Mari a zichouas anezo hag he gwaz a blantas ar vaz en douar...

War hent an dizro, Mari hag he gwaz en em houlenne petra sinifje an traoz-ze ?... Eun teñzor marteze ?...

Antronoz vintin, ar gwaz a yeas d'ar menez gand eun traoñ, eul langede hag eur bal-dol. Kerkent e stagas da doulla... D'an trede devez diouz an noz, dremm an traoñ a zistagas eun tamm metal diouz ar roh : arhant oa ! arhant gwenn o lugerni e palv e zorn dindañ bannou diweza an heol !...

Nebeud bloaveziou goude, Mari hag he familh a oa pinvidig-mor ! ken pinvidig ma ne ouient mui petra ober gand o 'feadra !... Ha Mari ne lamme morse ar walenn diouz he biz ! Ha mengleuz ar Menez a roe bepred muioh-mui a arhant !...

Pell amzer goude, Mari hag he gwaz, oajet braz, a varvas er memez bloaz...

Ar verh a oa kontant da lezel ar walenn gand he breur kosa. Med ar yaouanka ne felle ket dezañ ! Neuze e oe divizet rei ar walenn d'eun orfeber d'ober teir lodenn anezi. Ar pezo a oe greet...

Azaleg an ampoent-se, ne oe mui kavet an disterra tamm arhant er menez, kaer e oe turriad ha diduriad !

Ar verh hag ar mab kosa neuze da vev diouz o danvez...

Ar yaouanka, gand e lodenn eritaj, a freuzas an darn-vuia euz ar menez, med en aner... Hag eun nebeud amzer goude e varvas, rivinet ha kollet gantañ e spered...

Yann Gorrigan:



eul leor nevez

P. Trépos : « Le pluriel breton », 304 p., Emgleo-Breiz, Brest, 1957.

Nevez 'zo eo deut er-mêz eur pikol leor diwar-benn or yez : « Le pluriel breton », tezeñ-doktor an Ao. P. TRÉPOS, mestr-kelenner e Skol-Veur Roazon. Labour an Ao. Trépos a zo diazezet stard war enklaskou an Ao. P. Le Roux (*Atlas linguistique de la Basse-Bretagne*) ha war ar brezoneg a gomzer bremañ er pevar horn euz ar vro. Diskouez a ra petra eo buhez eur yez : penaoz e vez ijinet stummoù nevez d'ar gerioù dre ma teu ezommou nevez d'ar bohl a implij anezo. Diskouez a ra ive penaoz ez a ar furmoù nevez-se dre ar vro, da lavared eo levezon ar brezonegoù an eil war egile. Diskouez a ra erfin pegen pinvidig eo ar brezoneg, peseurt benveg dispar da zisplega menozioù a jom luziet e meur a yez. An doareoù niveruz da verka ar « pluriel » ha da ober gantañ a zo e gwirionez unan euz kaerra teñzoriou or yez, unan hag a ro dezi he zalvoudegez vrasa en deskadurez, unan erfin hag a zo chomet beo-buhezeg beteg an deiz a hirie. Leor an Ao. Trépos n'eo ket 'ta eul leor inouñz mad da zoktored hebken. Dudiuz e vo evid an neb a gar ar brezoneg hag a 'fell dezañ e anaoud muioh-mui. Meuleudi d'an Ao. Trépos e-neus displeget ken didro ha ficht ken brao danvez founnuz e ouiziegezh.

E gwerz e ti Emgleo-Breiz, B. P. 17, Brest. Priz : 1 500 lur.

Deskom brezoneg

Evid trugarekaad on Tad Santel ar Pab da veza bet teurvezed komz brezoneg ouz pelerined Santez-Anna-Wened, en 1954, an Tad Yann Nikolas e-neus bet ar vadelez da ginnig dezañ « **Deskom brezoneg** » en ano an aotrounez Stephan ha Seïte. Ar re-mañ o-deus bet an enor da reseo euz ar Vatikan, al lizer-mañ :

SEGRETERIA DI STATO
DI SUA SANTITA'

Dal Vaticano li 29 Mars 1958.

La Secrétairerie d'Etat de Sa Sainteté fait savoir aux Chers Frères Vincent Séité et Laurent Stéphan que le Souverain Pontife a daigné agréer avec bienveillance l'hommage qu'ils lui ont récemment fait de leur ouvrage intitulé « DESKOM BREZONEG ».

Elle leur transmet, avec les remerciements de Sa Sainteté pour ce geste filial, la faveur d'une paternelle bénédiction apostolique.

Segreteria di Stato
Di Sua Santità.

« ...Eur gerig hepken, evit ho trugarekaat a wir galon evit ho levr kaer, frouez-labour ho kalon hag ho spered... »

Ao. Beleg BLEUNVEN, Person Lokournan-Leon (4-1-58).

« ...Bennoz Doue evid « Deskom brezoneg ». Hemañ a zo plijuz-tre d'al lagad ha talvouduz kenañ e-keñver an danvez. N'am-eus ket bet amzer c'hoaz d'e lenn penn da benn, med, eveseet am-eus ouz skouer ar reolennoù war ar hemmaduriou « nevez » : S Z, c'h H, F 'F, ch J. En eur lakaad anezo, e-touez ar hemmaduriou dre vlotaad ha dre hwez, e teu pep tra da veza sklér. Kalz perziou mad a gavin c'hoaz, sur on, en ho levr, ha kinnig a ran deoh ha d'ho skoazellerien va gwella gourhemennou evid eur seurt labour dispar. »

Fr, C., kelenner.

« ...Merci pour « Deskom brezoneg ». Votre livre que j'ai rapidement parcouru avant de l'approfondir, me semble parfait. Il est progressif, direct, simple. Il a toutes les qualités que l'on peut souhaiter pour vulgariser notre chère langue que nous voulons conserver malgré tous les dangers d'une civilisation trop unificatrice et même stérilisante. Vous avez fait là de la belle propagande avec ce sens profondément éducatif dont vous avez le secret. Je suis sûr du succès de votre ouvrage. Bravo de tout cœur. »

P. Le F., Paris (2-2-58).

« Je reçois à l'instant votre méthode de breton. Elle me paraît, comme tout ce que vous faites, remarquable, et remarquablement présentée... »

D^r K. (Paris, 6-2-58).

« ... Je vous adresse toutes mes félicitations pour votre nouveau « Deskom brezoneg », remarquable dans le fond et dans la forme et qui contribuera efficacement à la diffusion du breton. »

P. F. (Nœux-les-Mines, 5-2-58).
Elève finissant de « Ar Skol-dre-Lizer ».

« ... Je vous expédie le devoir de la première leçon de « Deskom brezoneg ». Cette dernière méthode est vraiment bien et j'ai pris grand plaisir à l'étudier... »

Y. L. (le 9-1-58), élève de « Ar Skol-dre-Lizer ».

« ... « Gwelet em-eus ho levr nevez. Eun dra gaer eo hag a ra plijadur d'an daoulagad ha d'ar spered. Digemerit va starta gourhemennou evid al labour-se. »

P. M. Kelenner (20-12-57).

« ... « Deskom brezoneg » a vez greet joa dezañ. Kerkent m'eo erruet en ti, pep hini 'ra e gaoz da implij anezañ. N'on ket bet an diwezata : Prestig em-bo lennet anezañ penn-da-benn, heb re a boan, gant kalz plijadur. »

Daoust ha n'on ket re ziwezad o houlenñ ganeoh enskriva ahanon — ha Sœur Th. ganen — evit beza skoliet dre liziri ? Reudig an amzer ganeom betek Pask, hag abalamour da-ze om ken lezireg hag e taleom atao. Mar plij deoh staga ahanom ouz al labour e vo dare deom bale... »

Sœur A. euz Skol L. (20-2-58).

Evid kloza :

« ... « Echu eo ganen lenn « Deskom brezoneg », lenn ha studia, ha n'eo ket ober an neuz eo ; lincenn ha lincenn betek an hini ziweza. An neb a ouezfe difazi oll danvez pep kentel, a vije eur maout war ar brezoneg. Plijuz eo selled ouz an imachou, hag ouz ar moulladur. Plijuz eo ar pennadoù lenn. Kenteliuz penn-da-benn. Neus bet betek-henn beñveg ken talvouduz na ken ker. Va gourhemennou deoh ho taou. Doue ha Breiz d'ho paea. »

L. Lok (3-3-58).

Goulennit « Deskom brezoneg » digand V. Séité, Bleun-Brug, Château, C.C.P. 544-22 Nantes. 650 lur franco.

R	I	B	O	U	L	E	R
I		E		M	E	D	O
B	O	R	N		O	V	Z
I		A	A		U	Z	E
N	A	D	O	Z			L
	O	E		E	Z	E	L
	Z	N			R		O
M	A	N	A	T	I	O	U

GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 109

A-led.

- I. Aferiou diéz.
- II. Mab va breur.
- III. E penn eur gouent.
- IV. Glesker. - Pa vez heb e teu dillo.
- V. Pa ehanoh d'henn ober e vo echu ho tro war an douar.
- VI. Lod euz ar viou. - Eeün.
- VII. Araog ar respont.
- VIII. Poullrenn. - Laouer.

A-bik.

1. N'heller ket henn ober gand mël.
2. Enno e heller pourmen.
3. Beza heb anaoudegez vad.
4. Fentuz.
5. E-kreiz tennou. — Ar frouez-ze a zo mad.
6. Al labous a ra meur a hini bemdez.
7. Lost ar hoz. — E Lokmine.
8. Na seh na gleb.

	1	2	3	4	5	6	7	8
I								
II								
III								
IV								
V								
VI								
VII								
VIII								

KELEIER

Devez a vignoniezh Bleun-Brug.

D'an 23 a viz Meurzh, ar Bleun-Brug e-neus bet greet, e Pont-n-Abad, eun devez a vignoniezh evid yaouankizou ar Helhioù hag ar bagadoù euz Bro-Gerne.

An devez a grogas gand eun overenn da 10 h. 30. An Aotrou Priol, kure kanton Kastellin, a reas eur brezegenn, e-pad an overenn, war an doare kristen ha breizeg da dremen an amzer vak.

Goude e oe eun eskemm menozioù, renet gand G. Pijon, war kudennoù ar re yaouank en amzer hirio.

Da 13 h. an oll a brejas asamblez e skol Sant Gabriel : eur pred laouen gand kanaouennoù.

Da 14 h. 30, an Ao. Duigou a reas eur brezegenn dalvouduz kenañ war al labour vad a hell beza greet gand ar helhioù, ar bagadoù hag al lazou-kana war dachenn Breiz an amzer vremañ.

War-lerh ar brezegenn-se, e oe eun eskemm menozioù frouezuz braz, a hwezas lan e kalon ar re yaouank. Kan, koroll ha sonadeg a oe war-lerh.

Evid echui, ar Bleun-Brug a ginnigas eur verenn-vihan d'an oll, eun tri-ugent bennag, euz kelhioù pe bagadoù Lokronan, Douarnenez, Boulbriag, Kemper, Kastellin, Brest, Kombrit, Montroulez, Baod.

Pep hini a zistroas d'ar gêr laouen ha pinvidikeet, greet gantañ mignoned nevez.

D'an deiz kenta a viz Mae, e vo e Landivizio, evid strolladoù Bro-Leon, eun devez heñvel.

An Aotrou 'n Eskob Favé.

Kanet e-neus bet e overenn-eskob kenta e Kleder, deiz ar Zui-'Fask. Eur mor a dud a oa en iliz. Al laz-kana e-neus roet « **Ni ho salud, o leun a hras** » e peder mouez. Sarmon vrezoneg an Aotrou 'n Eskob nevez he-deus skoet an oll.

Pezioù-c'hoari brezoneg.

Da geñver vakansou Pask, ez eus bet c'hoariet er Grouaneg (Plougerne) **Mil pok** gand yaouankizou ar barrez.

Strollad Lanniliz e-neus c'hoariet e Treglonou **Mari-beg-an-diaoul** ha **Goell bier**, ar pezioù bet roet ganto dija er Bleun-Brug. Mond a raint ive da c'hoari kemend-all da Landeda.

Eur bern skouerennoù euz **Mari-beg-an-diaoul** a zo bet tennet nevez 'zo. O goulenñ digand an Ao. V. Séité, Ti-Carré, Châteaulin. Priz : 20 lur ar pezh franco.

Kanerien Landi.

D'an 21 a viz Mae, kanerien Landi a roio, e Montroulez, eur veilliadeg kaniri santel.

Buhez ar Zent.

Eun nebeud skouerennoù euz leor kaer **Buhez ar Zent** an Ao. Perrot, adaozet e yez Treger gand E. ar Moal, a jom da verza. Shriv a d'an Ao. Chaloni Thomas, person Plonevez-Portzay. Priz : 1 150 lur franco. (Keinet brao eo al leor.) C.C.P. 702-78 Rennes.

E Koatkeo.

D'al lun-'fask, « **Unvaniezh Koatkeo** » he-deus plantet eur groaz ruz el leh m'eo bet drouglazet an Ao. Perrot : eur groaz koad da hortoz eur halvar deread e mein kaled or Breiz.

Kenstrivadegoù-skol ar Bleun-Brug.

D'an 11 a viz Mae e **Plougerne**, d'an 18 e **Kleder** ha d'ar 5 a viz Even e **Lokournan** e vo grêt koñkourioù bihan ar Bleun-Brug. Eno e vo dibabet, e-touez an oll vugale o-deus labourer war ar brezoneg e-pad ar bloavezh-skol, ar re wella a yelo da houde da Ouel braz **Sant-Tegonneg**.

E **Plougerne** hag e **Kleder** e vo kroget gand ar hoñkourioù evid ar han hag an displega da 8 eur diouz ar mintin.

Da 10 eur 30 e vo bodet ar vugale en overn-bred. E-pad an overn e vo kanet kantikoù brezoneg.

Goude ar gousperou e vo grêt eur gouel brezoneg e sal ar Patronaj : klevet e vo ar re wella euz ar vugale ha laz-kana Plougerne a roio ive eun abadenn kaniri. Filmou a-liou diwar-benn Breiz hag ar Bleun-Brug a vo diskouezet ive.

E **Lokournan** e vo kroget gand ar hoñkourioù da 13 eur 30, e skol al leanezed. War-dro 16 eur e vo roet eun abadenn vrezoneg e sal ar Patronaj gand loreidi ar henstrivadegoù ha laz-kana Sant-Stanislas.

Kenstrivadegoù-skol ar Bleun-Brug a vo renet gand an Ao. Chaloni Le Ster.

Dervez a vignoniezh e Boulbriag.

D'an 20 a viz Ebrel ez eus bet e Boulbriag ive eun devez heñvel ouz hini Pont'n-Abad evid yaouankizou Bro-Dreger.

Tost da 200 a dud a zeuas euz a Bempoull, Pedernezh, Gwengamp, Lanuon, Boulbriag, Kallag, Mael-Keraez, Langonned.

An Ao. **Pijon** a gomzas, diouz ar mintin, diwar-benn ar perz a hell kemered yaouankizou ar helhioù war dachenn an abostolerezh katolik.

E-pad an overn-bred e oe sarmon vrezoneg gand an Ao. **Dubourg**.

Ouspenn 150 a dud en em vodas da goulz merenn. Dañset e oe da houde.

Diou brezegenn a oe greet e-pad an abardaez diwar-benn « Folklor hag abostolerezh katolik », gand an Ao. **Josselin**, rener an oberou kristen, hag an Ao. **ar Zant**, kure e Boulbriag.

An Ao. **Kalvez** a gomzas euz skol vrezoneg Sant Erwan e Ploueg.

An Ao. **Bourdellez** a reas eur brezegenn ouiziezh ha plijuz diwar-benn « An divroa e Breiz ».

Labour Skol.

Abaoe on niverenn ziweza or sekretour e-neus roet abadennoù brezoneg er skolioù-mañ : Guisseny (p. ha m.) — Kernouez (p. ha m.) — Treflez (p. ha m.) — Plounevez-Lokrist (m.) — Gouesnou (p. ha m.) — Plabenneg (m.) — Lokournan-Leon (p. ha m.) — Guilers-Brest (p. ha m.) — Pouldreuzig (p. ha m.) — Plovan (p. ha m.) — Ploneour-Lanvern (p. ha m.) — Guilvinec (p. ha m.) — Plobannaleg (p. ha m.) — Loktudi (p. ha m.) — Leskonil (m.) — Plomeur (p. ha m.) — Penmarc'h (m.) — Trefflagat (p.) — Dirinon (m.) — Loperhet (m.). — Ar pezh a ra gand ar skolioù bet gwelet a-raog **75 skol**.

Deut eo er-mêz niverenn 6 « **Les Cahiers du Bleun-Brug** ». Ar houmanant da « **Bleun-Brug** » ne dalv ket evid reseo « **Les Cahiers du Bleun-Brug** ». Evid o haoud, skriva da : **Jean Cormerais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60 Rennes.**

Koumanant-bloaz : 200 lur.

AR hlasker BARA



Eur paour da di 'r falz pinvidig
Oa êt da glask eun tamm boëd :
« D'in restachou, eun nebeudig,
'Roit 'n an' Doue, me ho ped ».

— Paour n'az po ket va restachou :
O rei a ran oll d'am chas.
Chach ganit-te da skasou,
Pe ahan ' lakain da gas !

Euz toull he dor ,eur vaouezig
He-doa klevet an den fall :
« Didostait, paour kêz reuzeudig,
'Vidoh aozin eur goan all ».

— Maouez, daoust hag em-bo ive
En ho ti eun tamm lojeiz ? »
— Ya, e-barz va gwella gwele
Kouskoh mad ahann d'an deiz ».

'Barz ar gambr, ar paour pa yeas,
E oa skeduz-tre e benn ;
Bannou tan ouspenn a strinkas,
Diouz e dreid, e zaou zorn gwenn.

War he daoulin, hi a gouezas :
« Piou oh ? eme 'r vaouez vad.
— N'ho-pet ket aon, a respontas,
Me eo ar Hrist, Mab an Tad.

« Ha pa vezoh bet tremenet,
C'hwi, d'an Neñv, war eün a zay,
Ha me, ar paour ken disprijet,
Er renk kenta ho lakay.

Yeun AR GOW.